

NOUELENNIK NEVEZ

EN ÉNOR D'AR

MABIC JESUS



LANHUON

E TI INTANVEZ AR GOFFIC, MOULER-LEVRER

1866

MOULINIER NEVES

MARQUE DÉPOSÉE

PROPRIÉTÉ DE L'ÉDITEUR.



L'ÉDITEUR

ET LA LIBRAIRIE DE CORRECTION, MOULINIER - L'ÉDITEUR

1852



NOUELENNIK NEVEZ

EN ÉNOR D'AR

MABIC JESUS

Ton anavezet.

Petra zo henoaz a nevez ?

Ann oll a zo el levenez :

Bras ha bihan a vandennou,

A ia, fenez, d'ann ilizou.

El lec'h chom er gher da repoz,

Perac monet, e pad ann noz,

D'ann iliz d'ober oraëson,

Da goves, d'ar gommunion.

Petra zo enta digouezed,

D'ann noz henoaz, ebars ar bed ?

Rac, a dra zur, zo eur ræson

A guement a zevoëion.

Ar ræson eus a guement ze

Eô ginivelez Mab Doue ;

Pëhini, ganet a viscoaz,

A zo ganet d'ann noz henoaz.

O noz a repar evit mad
Pec'het Adam, hor chentan tad ;
O noz, a ra deomp cals a joa,
O c'heffasi pec'het Eva !

O noz a venediction !
O noz a gonsolation !
O noz a c'hras, ô noz eürus !
Ganet eo ar Mabic Jesus !

O noz a ra deomp eur Zalver
Leun a garante, a zouster !
O noz divin ! ô noz santel !
Kanomp Nouel ! kanomp Nouel !

Pelec'h é m'oc'h, Patriarchet ?
Pelec'h é m'oc'hu, Prophetet ?
C'houi zo pelzo o c'hirvoudi
Da zonediguez ar Messi.

En em laouenit oll brema,
Ganet eo Jesus en noz ma !
Gloar da Zoue, tadou santel,
Ha kanomp oll : Nouel ! Nouel !

Erru oa ann amzer, merchet
Gant Doue, dre he Brophetet ;
Me tleie, 'vit he vrassan gloar,
Digass he Vab ar ann douar.

August Cesar a ordrenaz
D'he sujedi bihan ha braz,
Mont oll da laquat ho hanvou
Peb hini da gher he dadou.

Mari ha Joseb zisquene
Euz a lîgnez David roue,

Rac ze o c'hasse ann *edit*
Da Vethleem, keric David.

Goude pevar devez querzed,
E Bethleem int digouezed ;
Ha hi mont da rai ho c'hano
Da laquat var rollou ar vro.

Sant Joseb, gant calz a squisder,
A glasquas lonjeris dre gher ;
Mæs ar plasou mad oa mired
D'ar binvidien euz ar bed.

C'houi zo ingrat, Bethleemis,
C'houi refus enta lonjeris
Da Sant Joseb ha d'he Bried
Zo o touguen Salver ar bed.

N'ho devoa quet c'hoas, ben ann noz,
Cavet eul lec'h evit repoz :
Ret oa dezho en em denna
En eur c'hraouic evit lonja.

En eur c'hraouic e harz mur ker,
Hac esposet dar goal amzer :
Chetu al lec'h en deus choazet
Ar Messi evit dont er bed.

Eno da greiz-noz, ar Verc'hes,
Gant calz a laouenedigues,
A c'hanaz eun Doue eternal,
Kanomp dezhan : Nouel ! Nouel !

Ar buran euz ar guerc'hesed
A c'han neb en deuz hi croued !
Bezit souezet, Elet santel,
Ha ni, kanomp : Nouel ! Nouel !

'Vel ma teu ann heol da dremen,
Hép hi zorri, dre eur ueren,
Mari, hep coll he furete,
Zo deut da vout mam da Zoue !

Mar pignan d'ann êe, me a uel
Eil ferson ann Drindet Santel,
Var eun tron a c'hloar azeed
Hac adoret gant ann Eled !

Mar disquenan ar ann douar,
Me uel ar Roue ze a c'hloar,
Deit de vout croueduric dister
O Doue ! na brasset mister !

Roue ar zænt hac ann Elez,
En deuz eur c'hraou evit palez ;
Nep en deuz crouet ann evou,
Var eun tam plous, a squil daëlou !

Jesus, guir Doue ha guir den,
A c'houël evidomp, pec'herien :
Karomp enta Mabie Doue,
Hor c'har gant quen braz carante.

O va Jesus, c'houi squil daëlou
Evit gouele'hi ma fec'hejou,
Hac é meuz ar galon bemdez
Da offanci ho madelez.

Gant calz a c'hlaç'har em c'halon
E c'houlennan euz oc'h pardon !
Pardon ! Mabie carantezus,
Pardon ! pardon ! Mabie Jesus.

Recevit, Tad trugarezus,
Ann daëlou euz ho mab Jesus :

Daëlou quen dous ha quen tener
A zistano zur ho coler.

Prometi ran deoc'h, ma Doue,
Ho caret epad ma buhe ;
Ha na vezin quet mui ingrat
Offanci eun Doue quen mad.

Deut eo ann Elet var ann douar
Da gano meulodi ha gloar
Da Vabic ann Tad eternal.
Kanomp ganthé : Nouel ! Nouel !

Eun El timad a nij ive
Var ar mineou a Jude,
Da lavaret dar Bastored
He hoa ganet Salver ar bed.

« Bezit hep aoun, a lavaras,
Kellou eurus hac eur joa vraz,
Zigassan deoc'h, pastoret quer :
Ganet eo henoaz ho Salver.

» E Bethleem, en-eur c'hraouic,
C'houi gavo ganet eur Mabic,
Gant lianenou mailluret,
Tre diou vrec'h he Vam veniguet.

» Ar Mabic ze, e me ann El,
Eo Mabic ann Tad eternal ;
Dre garante 'nem incarnet
Evit redemption ar bed. »

Eur vanden vraz a Elez al
En em gav gant ann El ractal,
Hac oll é canant ar eun dro :
Gloria in excelsis Deo !

Ar Bastored, gant eur joa vras,
Ann eil d'he gile lavaras :
Damp da Vethleem da uelet
Salver ar bed, paz eo ganet.

E Bethleem pa erruant
Ar Mabic Jesus a gavant
Gant he vam, ar Verc'hes Vari,
Hac ezeont oll d'hen adori.

En eur c'houlâla gant joa outhan,
Ar Bastored a voq dezhan ;
Rac biscoaz n'ho devoa guelet
Mabic quen dign de vout caret.

Rac ze, gant Joseb ha Mari,
E carhent chom d'hen adori
Ha da gana : Nouel ! Nouel !
Da Vabic ann Tad eternal.

Distroi a reont d'ho mineou
Gant eur joa vraz n'ho c'halonou :
Ar chenta doa bet ann enor
Da visita hon Redemptor.

Ni garfe, a galon barfet,
Cahouet bonheur ar Bastored,
Ha guelet, gant hon daoulagad,
Eur Mabic quen dous ha quen mad.

Damp d'ann oferen hanter-noz ;
Hor Salver euz ar baradoz
A zisqueno var ann aoter,
Leun a garante a zouster.

Preparamp dezhan hor c'halon
D'he receo er gommunion ;

Ha neuze, gant eur joa santel,
Ni a gano : Nouel ! Nouel !

Ni a vezo eürus meurbed,
Eurusoc'h vit ar Bastored,
Rac ni zigasso hor Zalver
Euz ann iliz gêñ-eomp der gher.

Dioualomp de vout quen dispris
Evel me hoa Bethleemis,
Ha da veza quen mallërus
Zerra hor c'halon euz Jesus.

Eur stëraden gaër ha brillant,
O lugerni en Oriant,
A ras da c'houzoud, er vro-ze,
Hoa ganet Jesus er Jude.

Quen-tis tri Roue pe tri Mag,
Leun a feiz ha leun a gouraj,
En em laq en hent, hep dale,
Evit clasq ar Roue neve.

Eurus ann den a zent buhan
Euz sclerijen ar Speret-Glan,
Querzed a rai gant surentez
En hent euz he zilvidiguez.

A hed ann hent, ar stëraden
D'ar Rouane re sclerijen ;
Da Jerusalem ho c'hassas,
Hac eno hi zisparissas.

E ker neuze e c'hantreant,
Digant keris e c'houlenant :
« Pelec'h ma ganet, e mindi,
Roue ar Jude, ar Messi ?

» Ganet eô zur a dra certen
Ni beuz guelet he steraden,
Na d'hi heul ezoump deut hon tri
Evit hen clasq d'he adori. »

Jerusalemis oa troublet
Ha Herodes memes spontet,
Rac aoun da goll he c'hurunen
Gant Roue-ze ar Juzevien.

Assambli reas Herodes
Ann Doctoret en he balez
Evit gout gantho, difazi,
Pelec'h oa ganet ar Messi.

Ann Doctoret a respontas :
E Bethleem ar Messias
A dle bout ganet, a dra zur,
Rac merchet mad eô er Scritur.

Neuze e pedas Herodes
An tri Roue dont d'he balez
Evit gout ann amzer certen
M'ho devoa guel't ar steraden.

Goude quement ze ann tirant
A ra van da veza contant ;
Groït en doa he sonj, maleurus !
Da laza ar Mabic Jesus.

D'ann tri Roue he lavaras :
« It d'adori ar Messias,
Deut dre aman pe zec'h en dro
Maz-in d'he adori d'em zro. »

Ah ! tirant cruel Herodes,
Te zo carguet a draïtours,

Rac te ne glasques ar Messi
Nemeit evit he vassacri.

Perac ec'heus te bef laquet
D'ar maro ann Innosantet ?
Ar Mabic-man, den maleurus !
A vo t'a varner rigorus.

Er mæs a gher splan adare
Ho steraden d'ar Rouane
Ho c'hass a ra da adori
Da Vethleem Mabic Mari.

E Bethleem p'int erruet,
Ar Mabic Jesus deus cavet ;
Hac en em daolant d'an daoulin
D'adori ar Mabic divin.

Quennig a ra ar Rouane
Presanchou caër da Vab Doue :
Presanchou a vras consequans,
An aour, ar myrth hac an ézans.

Ann ézans, rac ma oa Doue :
Ann aour, da ziscouez hoa Roue ;
Hac ar myrth a verche ouspen
E tleie mervel evel den.

Un El a zæs a bers Doue
Da lavaret d'ar Rouane
Quemer ho zri eun hent distro
Evit en em renta d'ho bro.

Hastamp da vont, brema ive,
Da adori Mabic Doue ;
Ha da gana oll gant dudi
Nouel! dezhan ha da Vari.

Ar sperejou celestiel
Zo ive o cana, Nouel !
En énor d'ar Roue a c'hloar
Ganet henoaz ar an douar.

Kanamp ive gant ann Elet :
Gloar da Jesus, Salver ar bed !
En êe e kanimp assambles
He veulodi evit james !

*Gloria tibi, Domine,
Qui natus es de Virgine,
Cum Patre et Sancto Spiritu,
In sempiterna sæcula.*

Amen.

